

Instructionen
hag Oræsonen devot
evit assista en Oferen
gant profit bras,
tennet eis an Hewryou Brezoez.
~~~~~  
E. Guemter, e fz. Jansen-des-Lois Derrien.

in 16<sup>th</sup>

Instructionou  
 hac  
 Oræsonou  
 devot

Erit assista en Oferen gant  
 profit bras, tennet eus  
 an Heuryou Brezonec.



E. Guemper  
 E ty Yuen - San - Lois Derrien  
 Imprimer ha Librer.

Oræson

evit offr da Jone ar Sacrific adorabl  
eus an ofren hevez intantion an Ilis,  
hac evit goulen ar c'hraç d'en em  
renta participant ermi.

Var ton : Presantomp oll quithunan.

Offiomp da Jone ar Sacrific  
Poëtra ne deus a quer bras pris  
Evil Jous crucifiet  
En ofren representet.

Ar greis va c'halon e c'hoñjian  
Da Jone an ofren-man,  
Evit adoni an Dreinded  
Hag e drugarecât parfet.

Da drugarecât an Autrou  
Ereus e oll rad-oberon,  
Hac evit caout memor ato  
lus e boanion hac e varo.

Evit obteni e c'hraçou,  
Hac effaci va fec'hejou,  
Ouz pen evit an Anaon,  
D'ho dilivra eus ho frison.

Ofr a ran c'hoas ar Sacrific,  
Evit izomou an Ilis.  
Dar fin evit quement hini,  
Ma zoun obliget da bidi.

Brema fouden, o va Salver,  
En em gueffot var an Auter,  
Grit ma vezo ta preparer,  
Va c'halon d'ho tiguemeret.

Deoc'h en em adressant, Guer-  
c'hes,

C'hui eo va guir Alvocades,  
Allas ! allas ne doun quet din,  
E cleffe ho Map quer ouzin.

Obtenit din, Mam druezus,  
Ar c'hraç digant ho Map Jesus.  
D'en em renta participant,  
En Offeren devotamant.

Va Bal mat, so en c'hever,  
Va Faëron, va Maërones guer,  
Dil-Sant hac oll A'ez eurus,  
Va recommandi d'am Jesus,

Er Sacrific o va Ene,

Chommomp attantif gant Doué,  
 Lesomp souciou ar bed-mâ,  
 Evit epquen entet ourâ. Amen.



## ORÆSONOU

### DEVOT

#### VARBEP ARTICL.

Eus a Bassion hor Salver, appliquet var bep articl ivez eus an Oferen, evit assista enni gant profit bras. *Var ion ar Gananen, Fils de David par excellence.*

*Paza ar Baled etrese an Auter, he represent Jesus oc'h antren er Jardin Olivet.*

**O** Va Jesus, a oué affliget,  
 Gant un distridiguez mortel  
 Oc'h antren er Jardin Olivet,  
 Er guel eus ho poanniou cruel:  
 En union d'ho tristidiguez.

Ec'h offra deoc'h va oll boaniou  
 Ma servichint d'am silvidiguez.  
 Dre verit oc'h oll anqueniou,

*Pa gommanç ar Belec an Oferen er*

*Confiteor é represent Jesus o*  
*c'huisi ar goat en e Orason.*

O va Jesus en em brosternet,  
 Onz an douar dirac ho Tad,  
 Oc'h é bidi gant cals a resper,  
 Ha gant ur c'houesé vras a c'hoad  
 Grit ma rin ato va fedennou,  
 Gant ferveur hac attantion,  
 Ha lelec'h goad ma squillin dae-  
 lou,

D'am pec'het gant contrition.  
*Pa bign ar Baled ouz an Auter da*  
*boquet dezi, Jesus a zo trahisset*  
*gant yusas dre ur poq.*

O va Jesus oc'heus gouzanvet,  
 Ar poq treitour eus a Yusas,  
 Bete joquen moc'heus en galvet,  
 O mignon gant un douçder vras,  
 Na permettet quet ho trahissen,  
 Gant poq ar goal Gommunion,  
 Nac ouz va nessa é tisquesken.

Nep droug ha nep disuniou.  
 Pa za ar Balec e treze al leur da  
 gorn an Auser. Jesus a so garotet  
 ha treinet da dy Annas.

O va Jesus a oue garotet,  
 Ha reinet gant ar re vechant,  
 Torrit ar chaden eus va fec'het,  
 Am delc'h sujet d'an Arouant,  
 Hac gant liamou ho carantez,  
 Frenit quer stard va c'halon,  
 N'am bezo jamæs ar volonteiz,  
 D'ho offañs enep fæçon.  
 D'an introit pa ra ar Balec<sup>us</sup> ar  
 groas dirac ar leur; Jesus a rege  
 ue javedit dirac ar pontif.  
 O va Jesus oc'heus gant douçder,  
 Un senet chavedat anduret,  
 Hac a zo bet evit un trompler,  
 Abalamour din quemeret,  
 Grit ma souffrit gant patiantet,  
 Abalamour dec'hu irez,  
 Quement a vezogret em andret  
 azroug hac a gountroliez.

Pa zistro or Balec da greis an  
 Auser o lavaret Kyrie Eleison.

Jesus a so cæfer da dy Caiphas  
 eleac'h ma ont renoncet gant Per he  
 Aboftol.

O va Jesus é court Caiphas,  
 Gant oc'h aboftol renoncet,  
 Dr'en occasion m'en em gaffas,  
 Da doma etouez Soudardet,  
 Va mirit diouz goal gôpagnunez  
 Na ve dre aon pe gomplaisañç,  
 E couezzen enep sempladurez,  
 Hep caout egard ouz ho presañç.  
 Pa zistro ar Balec ouz an assistanter  
 o lavaret Dominus vobiscum  
 Jesus a zistro ouz Per evit ober  
 deza anaout ha regreti e bec'het.

O va Jesus oc'heus a druez,  
 Ouz Per oc'h Aboftol sellet,  
 Hac e laquat epad vuez,  
 Da vouela dourec è bec'het,  
 Roit din an daelou binigen,  
 Hac ur guir resolution,  
 Da zerc'hel mat deoc'h hivifiquè  
 Ma rin ur guir confession.  
 Pa za ar Balec da lavaret an Ora-  
 son hac an Aboftol; Jesus a so cæfer

*Da dy Bilat.*

O va Jesus a oue faussamant  
 Dirac Ponç Pilat accuset ;  
 Hep é resoc'h na man na féblant ,  
 Evit beza calomnier ,  
 Grit din ep en em formaliza ,  
 Soufr beza ep ræson tamallet ,  
 Ha perseveri d'ho servicha ,  
 Hep digourajamant eber.

*Pa za ar Baleo eus an Abastol  
 d'an Aviel, Jesus a so cagerous a  
 dy Bilat da dy Herodes.*

C'hui va Jesus é ty Herodes ,  
 So bet bafonet ha displiger ,  
 Ganta couls ha gan tud è Bales ,  
 En ur fræon exquis meurber ,  
 Bete ma viscas deoc'h , va Salver  
 Ur sae inoquant ha mezus ,  
 Dëffat na respontac'h ar guer  
 Ouz é c'houlennou curius ,  
 Roit din ar gouraich da soufr ivé  
 Beza goapeat gant an dat fall ,  
 Ha da zisplijout ar vanité ,  
 Quen en dillat quen en traou all ,  
 N'am dilezit quet da lavaret ,

Na da ober netra biquen ,  
 Evit beza ganto istimet ,  
 Mæs evit plijout deoc'h heppquen.

*Pa zistro ar Baleo eus an Aviel  
 da greis an Auer Jesus a zistro a  
 dy Herodes da dy Bilat.*

O va Jesus, a oue ranvoyer ,  
 Gant Herodes da Ponç Pilat ,  
 Pere oue goude mignonet ,  
 Diyar ho coust oan egarat ,  
 Grit ma rin fors evit tud vechant  
 D'an em ober a enep din ,  
 Hac eus a bep seurt goal dretamât  
 Diouzoc'h exempl ma profitin.

*Pa zeu ar Baleo da zifolo ar  
 C'halir goude an Aviel : Jesus a so  
 divisquet ennoas evit beza foueter.*

O va Jesus, oc'heus acceptet  
 Ar vez hac ar gonfusion ,  
 Da veza be en noas divisquet .  
 Gant cals a outraich evidon ,  
 Roit ar c'hraç d'en em zivisca ,  
 Dious ar pec'het hac ar viçou ,  
 Ha na din quet da gomparrissa  
 Dirazoc'h noas a vertuziou.

D'an Offertor pa offr ar Balec da  
Zoue an Hostif var ar bladen ha  
ar guiner C'halin ; Jesus o veza  
stagnet ouz ar pilier , a so fouetter

O va Jesus oue tourmantet ,  
Quer cris er flagellation ,  
Grit ma souffrin gant patiantet ,  
Ar fouet eus ho correction ,  
A na zuin dre nep pec'het marvel  
Ispicial o impureté ,  
D'ho c'hafligea biquen va Salver  
M'ho servichin gant pureté.  
Pa c'holo ar Balec ar C'balir abars  
dont da vouele'hi é visitet pen Jesus  
a voue goloet gant ur guruné a spern  
calet.

O va Jesus , a so bet toullet ,  
Ho pen dre va superbité ,  
Gant ur gurunen a spern calet ,  
Da rei din an humilité ,  
Grit ma tuin d'en em humilia ,  
E pep façon var an douar ,  
Ma teuot en Eé d'am glorifia ,  
Gant ur gurunen a c'hloar.  
Pa vouale'h ar Balec e visitet Pilat

a ouale'h é zouarn diouz Jesus oc'h  
é anaout euit un den just a santel  
dirac an Yuzevien.

O va Jesus a oue poursuivet ,  
Gant ar Yuzevien dar maro ,  
Ha c'huy divlam ha just discleriet  
Gant Pilat memes dirazo ,  
Na bermetit quet é poursuiven ,  
Enep oc'h inspiration ,  
Da drangressi bepret ho lesen ,  
Oc'heul va inclination.  
Pa zistro ar Balec ouz an assistan-  
tet o lavaret Orate Fratres Pilat  
a zisqueze Jesus dar Yuzevien e la-  
varet Ecce Homo.

O va Jesus a oue disqueset ,  
D'ar Yuzevien c'asi en noas ,  
Ho corf gant ar fouetou dispennet  
Ur gos vantel dreist he tiouascoas  
En ho tourn deou ur gorsen ,  
Ma stag ouz ho Pen adorabl ,  
Ur tourquet spern eguis Gurunen  
Beuser ho pisaich en ho coad.  
Ha c'hui en ur stat quen truezus  
N'o deoue trues ebet ouzoc'h :

Quent se ar voler sediti ,  
 Barrabas a breferjont deoc'h ,  
 Me so bet siouas quen dinatur ,  
 Ha quer barbar en ho quêver ,  
 O preferi deoc'h va fligeadur ,  
 Ha va interest va Salver.

*D'ar Prefac Per omnia sæcula  
 sæculorum, Jesus a zo condaunet  
 d'ar maro.*

O va Jesus a so bet barnet ,  
 Ous ur Groas infam da yervel ,  
 Grit ma vezin ivez preparet ,  
 D'ar maro pa zeuot d'em guervel  
 Ha grit ma touguin o jugeamant  
 Non pas jugeamant faus an den ,  
 Ha na varnin quet injustamant ,  
 Va,nessa ivez birviquen.

*D'ar Memento goude Sanctus  
 pa bed ar Balec evit ar re vao ;  
 Jesus a zoug e Groas.*

O va Jesus oc'heus bet douguet  
 Ur Groas pounner evidomne ,  
 Grit ma touguin a galon parfet ,  
 Va c'hroas evidoc'hu ivê ,  
 Oc'h en em vortifia bendez ,

Hac o renonç din va unan ,  
 Hac oc'h anduri gant carantez ,  
 Peb seurt trevel ha peb seurt poan  
*Greomp hor Memento yvê gant ar  
 Balec evit ar re vao.*

Er memento se ho pet memor ,  
 Eus va oll mad oberourien ,  
 Evit ho cloar ! ho va Redemptor  
 Conservit ho servicherien ,  
 Me recômant deoc'h va mignonet  
 Va c'herent ha quement hini ,  
 M'ouzoc'h ervat ezoun obliget ,  
 Evito, va Doué d'ho pidi.

*Pavez astennet gant ar Balec e  
 zaouarn a ziouc'h an Hiltif hac ar  
 C'hilir abars ho c'honsacri ur Ve-  
 ronic a zeuas da asten he goüel evit  
 se'hi e vichaich da J su.*

O' va Salver oc'heus en tri fleg  
 Ahouel ar Veronic eurus ,  
 Ho portret adorabl imprimet ,  
 Pa zec'has ho faç truezas ,  
 En teir buiflañç eus va Ené ,  
 Ho passion imprimit down ,  
 M'am bezo soinch ahanoc'h ivê

**H**a ma ho quinn em chalon.  
*Pa vez ar Balec oc'h ober sin ar*  
*Groas azioe'h an Hostif ac ar C'ha-*  
*lir abars o c'honsacri Jesus a so*  
*stagnet ouz ar groas gant tachou.*  
**O** va Jesus a so bet tacher,  
 Ouz ur groas issam evidon,  
**H**a oc'heus bet dreizi effacer  
 Hor scrit a gondaunation  
 Toullit va c'halon dre an doujeac  
 Rac ho jugeamanchou divin  
 Evit bepret en obeissanc  
 D'ho courc'hemennou ma vevin.  
*Pa vez savet a huel an Hostif con-*  
*sacret gant ar Balec ; Jesus Cruci-*  
*fiet a so savet a ispil ouz ar groas.*  
**M**oc'h ador ac o car va Salver  
 So bet gant ar c'hruela groas,  
 var boues an tachou o corf pouner  
 Savet a ispil ouz ar Groas  
 Dious traou ar bed sivit va c'halo  
 Tennit hi varzu ac ennoc'h.  
 N'en em stago quet e nep facon  
 Ous netra tout nemer ouzoc h.  
*Pa vez savet ar C'halif yve goude*

*ma vez consacret goad Jesus a red*  
*eus e c'houlion digoret ouz ar groas*  
**E**vel ma red ho Coat precius  
 Eus ho couliou digoret  
 Eus a nezo yve va Jesus  
 Ar feunteun eus ho grac a red  
 Var va Ené ta grit ma redo  
 De houalc'hi diouz va fec'hejou  
**H**a ma quinn ar remed eno  
 Ouz ar goal tentationou.  
*D'ar Memento goude gorreou pa*  
*bet ar Balec evit ar re varo Jesus a*  
*bed ouz ar Groas evit an natur hu-*  
*men a memes evit he vourevien*  
**O** va Jesus a bedas ho Tad  
 Paedoc'h ouz ar Groas stagnet  
 Da rei ar pardon dan dut ingrad  
 Memes d'ho pourevien galec  
 Roit din ar vertus eus an doucder  
 Da pardon a galon vad  
**A** dious oc'h exempl o va Salver  
 Eleac'h an dronc da ren a ar mad.  
*Greomp hor Memento ivez gant ar*  
*Balec evit recommandi di Zoue ar*  
*re varo pere a so er Purgator.*

Er memento-se ô va Jesus  
 Mo supliant da gaout memor  
 Eus an Aanon hirvoudus  
 A so é tan ar purgator :  
 Dre ho Maro hacho Passion  
 Dilivrit-hi ous ho zourmant  
 Ar re m'en eus obligation  
 Dezo particulieramant.  
*Pa lavar ar Balec Nobis quoque*  
*peccatoribus al Laër deou en em*  
*gouventis ouz Jesus.*

O va Jesus c'hui a brometas  
 Ho parados dal Laër deou  
 En heur ar maro pa regretas  
 Gant ur guir gueus bec'hejou  
 Roit din ar c'heus-se var va maro  
 Ma clevim gueneoc'h couls hac en  
 Ar c'homsou mâ C'hui *vez*o Hinto  
*curus em barados guenen.*

*Pa lavar ar Balec ar Bater a so*  
*seiz goulen enni é represent ar seil*  
*guer abronongas I-sus ous ar Groas.*  
 Etre ar seiz guer ô va Jesus  
 Hoc'heus ous ar Groas prononçet  
 Da Sant Yan ho Mam garantez

C'hui oc'heus bet recommandee  
 Ac oc'h Ené d'ho Tad Eternel  
 P'adoc'h var ar poent d'he renta  
 Va éné deoc'h pa zuin de vervel  
 A recommandi dreist pep - tra  
*Evit en em recomman li d'ar Ver-*  
*c'hes Sac'r iwe.*

O Guerc'hes sacr Mam drugarefus  
 Pa zoun e personach Sant Yan  
 Recômandet deoc'h gât va Jesus  
 Ho quem-ran evit va Mam  
 Rac-se ta evel eus ho crouadur  
 Ho pet ac'hanon ar fourci  
 B quement poan ha displigeadur  
 A ouffe va inquieti.  
*Pa rant ar Balec an Hostif azioc'h*  
*ar c'halir o r'ispartia aneil pe'z dious*  
*eguile Ené I-sus a zisparti diouz o*  
*Gors o vervell er Groas.*

O va Jesus oc'heus andurê  
 Er Groas evidon ar maro  
 Grit ma tuin da vervell a speret  
 Da draou ar bed-ma var un dro  
 Eus pa zui va c'horf da vervell  
 Ma zai va Ené da repos.

O reço ar vuez Eternel ;

Digueneoc'h en ho Parados.

*Pa lez ar Balec un tamio eus an  
Hostif de zisquen er C'haliv , Ené  
Jesus a zisquenebars el limbou gou-  
de he varo.*

O va Jesus c'hui a zisquennas  
Dazillas an Eneou santel  
Eus al Limbou hac a chadennas ,  
Satan hon adversfour cruel ,  
Grit ma trec'hin ha ma tisquenno  
Eus ho Goad sacr ar vertus vras  
Er purgator evit ma tenno ,  
An Anaon eus an tan griset.

*Pa lavar ar Balec Agnus Dei &c.  
pehini a sinifi Oan Doue a effac  
pec'hejou ar bet ho pezet truez ouzâp  
cals a oue convertisset bete s'quen  
eus ar vouevien dre vertus ar maro  
a Jesus hac a zisthoas dar guez ar en  
ur quei var boul o galon , gant  
queus d'he veza crucifiet.*

O va Jesus oc'heus dre ho maro  
Darn eu ho pouevien touchet  
r egreti gant ur c'heus garo

D'ho peza ouz ar groas tâchet ,

Dre ar merit eus o Passion ,

Grit ma vezin convertisset .

Gant ur guir gueus ha contrition

D'ho peza siouas offancet.

*Pa Gommuni ar Balec olavaret  
Domine non sum Dignus &c. Va  
Autronne doun quer din ec'h âtreac'h  
em Estomac ; Jesus a sô sebeliet en  
ur bes nevez.*

## GOMMUNION SPIRITUEL.

O Va Jesus , en ur bez nevez ,  
C'hui pehini a oue sebeliet ,  
Grit ma tuin d'ho sebeliya ivez ,  
En ur galon purifiet ,  
Ne doun quer din e tevac'h em éné  
Clan eo ha lous gant ar pec'het ,  
Mæs livirit ur guer va Doué  
Hac e véso salo renter.

E creis va c'halon e mæs regret  
D'ho peza offancet va Jesus  
Hac e protestan d'en em viret ,  
Gant o craç diouz pec'het grevus  
Enoc'h e credan hac ec'h esperan  
M'en em resin d'ho volonte ,

C'hui oc'hunan eo a zefirant  
C'hui epquen eo va c'harantez.

Deu em Ené ta, deut va Jesus,  
Dre ho c'raç spirituelamant  
Oc'hertos ma vezin quen eurus  
D'ho receo ivé realamant,  
A grit ma vezin chenchet enoc'h,  
M'hor bazo ur memes speret  
Ha na vezin biquen diouzoc'h  
Dre nep seurt pec'het separer

*Pa zeu ar Balez da voualc'hi e vi-  
siet azioe'h ar C'halif ha d'osec'hi  
gant ar purificator Joseph d'Arima-  
ni ha Nicodemus a zeu da voualc'hi  
ha da onganti Corf Jesus oc'h é liana  
etou é ur lincer guen-c'an.*

Goudé mervel ho Corf va Jesus,  
A oué goualc'het hac ongantet,  
Gant Joseph ha gant Nicodemus  
En ur lincer venn lianet.  
Emc'halon grit ma oc'h ongantia  
Dr'er pratic eus ar vertuziou  
A dre ar ferveur m'ho contentin  
Em oll c'evrou hac oll boanion  
*pa zeu ar Balez da gaout ar levr*

*goude ar Communion, Jesus a se  
refusiet a varo da veo.*

Va Salver eus ar bez sorties  
Ha ressusitet glorius  
Eus a bep viç ar bez milliguer  
Grit ma quitain victorius  
Hac en ho c'raç ma ressuscitin  
O cundui ur vuez nevez  
Ac en o cloar ma c'hapariñin  
Unan an dizion - ma ivez.

*Pa zistro ar Balez ouz an assistantes  
o lavare Dominus vobis an Autrou  
ra-vezo gueneoc'h Jesus a so aparif-  
set d'he Zisquibin o lavaret dezo  
ivé ; Pax vobis ar peoc'h ra vezo  
gueneoc'h.*

Va Jesus oc'heus rejouisset  
Ho Mam guer hac hoc'h Ebestel  
Pa zouc'h bet dezo apparisset.  
Gant ur c'hloar vras hac immortel  
Pa n'allan er vuez ma o quelet  
Roit din an heur me ho supli  
Gât ho Sêr hac ho Mam benigues  
Er vuez all d'ho contempli  
*Pa zeu ar Balez d'ar c'hollere ou pe*

pe dan Oraſonou diwez a Jesus a chōp  
gāt he zisquibien spag a zaouguēs  
des goude ma oarressisset.

O va Jesus o poue'r vadelez,  
Da chom da rei instruction  
Do Tisquibien epad daouguen des  
Goude ho resurrection  
Pliget gueneoc'h ato va c'heren.  
Ma rin bepret ho volonte  
Ep teri james nep gourc'hemen.  
Eus ho lezen a garantez.

Pa zistro ar Balc da lavaret an  
diwez Dominus vobiscum hac Ie  
Missa est iit echu eo an Oferen Jesus  
goude beza lavaret d'he Zisquibien.  
iit da h'eseq an Avel par tout dre'r  
bed a bignis en hofesangen Ee.

O va Jesus a so bet pignet  
Gant gloar a triomph bras en Ee,  
Dirac'ho Tisquibien benniguet  
Grit ma zaimp dy d'oc'heul yvé  
Ha ma reimp hon oll antretien  
Gueneoc'h ha gant ho Sent eno  
O risplijour an t'hou terrien  
Pa na de houma e hor bro.

Pa ro ar Bales ar benediction e fin  
an Oferen ; Jesus a zigag ar Speret  
Santel d'e Zisquibien.

Va Jesus oc'heus bet digaget  
Ar Speret clan d'ho Zisquibien  
Pa zedount assambles unisset  
O per severt d'he c'houlen ;  
Grit ma tui gant e seiz doneson.  
D'ober em éné e zeumerang  
Evit ma roi din en Oraſon  
Hac er mad ar perseverang  
Action ar c'hraeg evit trugarecat Je-  
sus goude an Oferen


'oh trugarecat o va Salver  
M'o meul va Autrou Souveren  
Da veza gret din quer bras faver  
Da assista en Oferen  
Ma n'am eus quer assistet enni,  
Gant an devotion requis  
Ho pedan yve d'am pardonni,  
Dre'r vertus eus ho Sacrific.  
Evit goulenn a c'hraeg a veza del da  
Zoue hac erad an deis hac epad ar  
vurzo trec'hi peb goat d'antaton.  
Duz pen ho suplian va Jesus


Dre veritou ho passion  
 Grit dia rebarbato courachus  
 Ouz peb seurt goal dentation  
 M'ho servichin gant fidelite  
 Hirio hac epad va buez  
 Ha ma c'hillin un éternité  
 Ho meuli gant ar Sent ivez.

Amen.

FIN.

Imprimer gant approbation  
 ha permission an Autrou Illus-  
 trissim ha Reverendissim Yan  
 Lois Gouyon à Vauduran  
 Escop, Cont à Leon Conseiller  
 dar Roue en e oll Cusullion  
 Ec. (Evêque de Léon le 17<sup>es</sup> à  
 1763.)







Document numérisé en 2015